

Beach vad d'hor bagig er bed-man !  
 D'hon ene beach vad ive !  
 Gras deomp, goude hon tremenvan,  
 Da zouar' e porz an ee !

An Aoutrou de Treanna, euz a vaner  
 Kerazan, o veza kouezet en eul lenn doun,  
 hag o veza prest da veuzi, a voestlaz sevel  
 eur japel d'ar Verc'hez. Saveteet gant Mam  
 Doue, e talc'haz d'he c'her, ha sikouret ive  
 gant arc'hant ha bolontez vad ar gristenien  
 euz tro-var-dro, er blavez 1699 e reaz sevel,  
 e parrez Plogoff, ar japel-ma da Itron Varia  
 ar Veach-Vad.

\*\*

Daou bardon ar bloaz a zo e Beach-Vad.  
 Unan, ar pardon braz, a zo d'an eil sul a  
 viz Gouere ; egile d'an eil sul a viz Guen-  
 golo. — D'al lun Fask, e vez ive oferen  
 bred er chapel-ze.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 2 Octobre 1892.

E. FLEITER.

Kemper, Moullerez Kerne, ru an Dudchentil.

## KANTIK

## Itron Varia ar Veach=Vad

E PARREZ PLOGOFF

DISKAN :

*Itron Varia ar Veach-Vad,  
 Hon hentchit var ar mor brez,  
 Dreist pep tra mirit hor bagig,  
 Pa vimp o tremen ar Raz.*

1

Var eul lenn o vont da veuzi,  
 Aoutrou Maner Kerazan  
 A voestla sevel d'eoc'h eun ti :  
 Setu hen savet aman.

2

D'he beurober al labourer  
 Hag ar pesketaer, laouen,  
 Var arc'hant perc'hen ar maner  
 A lakeaz ho guenneien.



3

M'ar bezit deomp, Guerc'hez santel,  
Eur Vam douz, madelezus,  
Ni zalc'ho ive ho chapel  
Bepret kaer, ato skeduz.

4

Hon treid var eur blanken tano,  
Ni vel beandez an danjer,  
C'hui, o Guerc'hez, hon diuallo :  
Hor bagig zo ken dister !

5

Pa ve dirollet an avel  
Goest d'hor skei ouz ar c'herrek,  
Ni a zell varzu ho chapel  
Ouz ho pedi kalounek.

6

Evel eun tour-tan benniget,  
C'hui a ro d'eomp sklerijen,  
C'hui zifen ar vartolodet  
Ouz kounnar ar tarziou guen.

7

E boaë an Anaoun, o Guerc'hez,  
Kalz, siouaz, a zo chommet ;  
Hon tud ho defe dienez  
Ma vemp ni ive kollet.

8

Truez eta ! e peb amzer,  
D'ar martolod roit skoazel,  
Var he vag beillit, Mam dener,  
Pa zalc'h sonj euz ho chapel.

9

Mes dreist pep tra ni a c'houlen  
Silvidigez hon ene ;  
Ar bed zo evel luc'heden  
Dirag an eternite.

10

Ni fell deomp, koustet pe gousto,  
Mont d'ho kueleter bed all ;  
Diouallit hor c'haloun ato  
Diouz bilim an techou fall.

11

Ouz bro Frans hag ouz hor parrez  
Taolit eur zell truezus :  
Grit dezo ho diou a nevez  
Senti ouz ho Mab Jezuz.

12

Bag sant Per, an Iliz santel,  
A zo ive goal gaset ;  
Evit he harpa er vrezel  
E klask ho tourn benniget.